

## Rummad an dastumerien (1/4) Baradoz an dastumerien boestoù sardin

Kentañ lodenn rummad an dastumerien. Deomp war-zu Douarnenez ha Stal ar Sardin. Chantal Rivier a zegemer pratikoù liesseurt hag etrebroadel.

Publié le 28 Juil 17 à 8:35



Chantal Rivier a werzh sardin ganti e-unan. (©Le Progrès de Cornouaille/Courrier du Léon)

Brav eo an amzer ha dont a ra e stalig Chantal Rivier tropelladoù touristed niverus, e kreizig kreiz Douarnenez. An holl anezho o deus ar memes c'hoant : diskoachañ ur voest sardin nevez evit pinvidikaat o dastumadeg.

Chantal Rivier he deus dizoloet an entan-mañ pa oa perc'henn ur stal-voued. « Alies e veze goulennet diganin gant ar pratikoù boestoù sardin nevez, deuet eo ar mennozh sevel ur stal gant boestoù sardin hepken. E 2001 e oa. » Ar stal na c'helle bezañ nemet e Douarnenez, kêr ar pennoù sardin.

32 labouradeg er c'hantved paseet

E penn kentañ ar c’hantved paseet e oa ar sardin pinvidigezh pennañ Douarnenez. Tost da 900 bag-sardin a oa e porzh ar Rozmeur ha 32 labouradeg e kêr. Ar baotred a besketae, ar merc’hed a lakae ar sardin er boestoù-mir. Echu eo gant an amzer dremenet-mañ, ne chom mui nemet 3 labouradeg : Kerbriant, Connetable (perc’henniezh Chancerelle), Beg Penmarc’h (perc’henniezh Chancerelle).

« E penn kentañ an XXvet kantved e veze skeudennaouet ar boestoù gant al labouradegoù gant ur vaouez gwisket gant an dilhad hengounel », a gendalc’h Chantal Rivier en ur ziskouez ur voest melen gant ur plac’h eus Douarnenez. « Honnezh a oa bet embannet gant al labouradeg Guy, war-lerc’h an eil Brezel Bed. Capitaine Cook en deus prenet al labouradeg dibaoe met dalc’het eo bet an dresadenn. » Labouradegoù ‘zo o deus dibabet taolennoù kentoc’h. Connetable en deus lakaet war wel e-pad pell livadurioù o leurenañ ar pesketa evit ar sardin bloaziet.

## Sardin a galite uhel

Al labouradeg Gonidec a c’houlenn digant ul livour skeudennaouiñ he boestoù Mouettes d’Arvor, embannet e steudadoù bihan. Fanch Mocal eo en deus livet re 2016, Michel Barzic re 2017. Gonidec ha labouradegoù all c’hoazh o deus embannet ivez boestoù evit gouelioù ar vro : Gouelioù ar Mor e Brest hag e Douarnenez, Ar Rouedoù Glas, Gouelioù Kerne... En holl e kinnig Chantal Rivier ouzhpenn hanterkant boest eus dek merk disheñvel.

An holl pe dost o deus sardin bloaziet. Ar re-mañ ne vezont ket prientet er memes mod hag ar sardi hengounel. Ar sardin « mod kozh » a heuilh ur protokol resis-tre. Er c’h-Quiberonnaise, ar sardin fresk (48 eurvezh d’ar muiañ) a vez holenet, divouzellet, dispennet ha splujet en hili. Goude bezañ bet riñset ha sec’het e vezont fritet en eoul tro-heol. An deveradur a bad un nozvezh a-bezh. Ar sardin a galite uhel a vez lakaet er boestoù war-lerc’h, en un doare resis-tre, ar c’hof war wel.

Chantal Rivier a ali d’he fratikoù derc’hel ar sardin. Peogwir e teuont da vezañ gwelloc’h-gwellañ gant ar bloavezhioù, e-giz ar gwin mat. Ar vaouez a gemer amzer ivez evit treiñ un nebeud boestoù evit ma vefe koñfizetoc’h ha teuzetoc’h ar sardin. « Pratikoù ‘zo a zeu evit ar voest ; lod all evit ar pezh a zo e-barzh. Un teuzar eo gant patatez yen pe gant bara », a zispleg Chantal Rivier. He boest kerañ a goust 10 euro.

Stal ar sardin, 7 straed Bretton, Douarnenez. 02 98 92 70 83.

[https://actu.fr/bretagne/douarnenez\\_29046/rummad-an-dastumerien-14-baradoz-an-dastumerien-boestou-sardin\\_11351476.html](https://actu.fr/bretagne/douarnenez_29046/rummad-an-dastumerien-14-baradoz-an-dastumerien-boestou-sardin_11351476.html)